

Dornskridoù Milin: Kanaouennoù

44. AR SEIS MANAC'H

Er gerik a Vountroulez war ann hent da vont da Roum
 euz savet eur gouent nevez zo enn han menec'h o choum
 zo savet eur gouent nevez zo enn han menec'h iaouank
 ne baouezont noz na deiz da ziroll ar merc'hed koant.
 eur vinorezik iaouank hag a ioa meurbed devodez
 a iea da iliz sant Franses, aben diou, teir gwech bemdez
 ha dont unan euz ar venec'h na da lavaret d'ezhi :
 - deut ganeomp-ni, minorezik, deut ganeomp-ni(me) d'hon ti.
 eno welot ann taoligner, ar mysteriou exselant.

.....
 P'oa bet seiz mis hanter eno n'en em gav ket tamm aez
 hag ivez ar seiz manac'h meurbed en em gav diez
 ha dont unan euz ar venec'h na da lavaret d'ezhi
 - Aotrou Doue, minorezik, 'trou Doue, petra raimp-ni ?
 Dont a rai eur vikel nevez, e peb leac'h vezo klasket
 Siouaz dehoc'h hu 'ta, minorezik, c'houi ranko beza lazet.

..... °(ar_re-ma a zo a re er werzenn)
 P'edo ar re-ma° ann daou iaouank o tont gant-hi d'ann traou
 edo ar re (gosa) o rei dezhi fasadou
 - en han' Doue 'ta, tad Olier, enn han' Doue n'am skoit ket,
 eur bugel zo etre va diou gostez meurbed a zo souezet.
 - Ni hon euz lazet teir femelen, krouadur gant pep hini
 ha c'houi ivez Fransezaik an drivac'hved a reont hi.
 Ni zo kriz evel ann diaoul° ha ien evel ann erc'h °a-us:
 ne reomp van evit gwelet gouela na map na merc'h. diamant

.....
 eunn den iaouank euz ann arme a zeuaz da c'houlenn loja
 -Iit enn ho roud, den iaouank, ne vez lojet den ama.
 Setu ann digentil iaouank o tistrei war he c'hiz
 hag hen gwelet eur femelen, e traouik ann iliz.
 hag hen monet da loja)

anntronoz paz eaz ac'hano ez eaz d'eun ostaleuri
 e lavaraz d'an ostiz : - roit d'in da zibri, da eva
 me lavaro deoc'h eun torfed am euz gwelet enn noz-ma.
 me meuz gwelet laza eur plac'h, kaera plac'h a ioa er bed
 Kaera plac'h a ioa enn Idol hag a oufed da welet.
 ann hini zo o kana ann oferen eo dalc'her ar goulou
 ann hini zo oc'h he zervicha a zo paotr ar c'hontellou.